



**KEMENNADENN GELAOUÏÑ**  
**COMMUNIQUE DE PRESSE**  
d'an 3 a viz Du / 3 novembre 2023

## **« Redek ar ran » : Kanaouenn ofisiel** **Ar Redadeg 2024**

### **« Redek a ran » (Je cours) : La chanson** **officielle de la Redadeg 2024**

Stad zo ennomp ouzh ho pediñ evit lañs kanaouenn ofisiel Redadeg 2024. "Redek a ran" a vo kanet evit ar wech kentañ disul (05/11) da vare abadenn Kaolila er festival Deus 'ta e Brest. War al leurenn e vo ivez El Maout en deus labouret ganto evit ar ganaouenn-mañ.

Liv ar rock hag an elktro a vo gant kanaouenn ar Redadeg 2024 eta, peadra da reiñ nerzh ha lusk d'ar rederien war hentoù 5 departamant Breizh etre ar 17 hag ar 25 a viz Mae 2024 etre Beg-ar-Raz ha Montroulez.

Gant Gege Gwenn, skrivagner brudet eus Menez Are, eo bet skrivet ar c'homzoù. Gantañ e vez savet ordin komzoù kanaouennoù Kaolila. Awenet eo bet gant tem ar Redadeg 2024 "Treuzkas!"

Kinnig a reomp deoc'h kaozeal gant an arzourien da-heul an abadenn, tro 3e15 e kichen al leurenn.

*Nous avons le plaisir de vous inviter au lancement de la chanson officielle de la Redadeg 2024 à l'occasion du festival Deus 'ta le dimanche 05/11 à Brest lors du concert de Kaolila (14h30).*

*"Redek a ran" (Je cours), c'est le titre de cette chanson interprétée par le groupe Kaolila, accompagné à cette occasion par El Maout. La chanson aux couleurs rock et électro accompagnera et motivera les coureurs sur les routes de Bretagne du 17 au 25 mai, de la Pointe du Raz à Morlaix.*

*C'est Gégé Gwenn, écrivain bien connu des Monts d'Arrée et parolier du groupe Kaolila qui en a écrit le texte. Il a été inspiré par le thème de la Redadeg 2024 "Treuzkas!" - Transmets!*

*Nous vous proposons un échange avec les artistes à l'issue du concert, aux alentours de 15h45.*



**Darempredoù / Contacts :**

Fulup Kere : 06 51 86 98 59 [fulup@ar-redadeg.bzh](mailto:fulup@ar-redadeg.bzh)

Cyril Lelong 06 13 30 19 49 [cyril@ar-redadeg.bzh](mailto:cyril@ar-redadeg.bzh)

[www.ar-redadeg.bzh](http://www.ar-redadeg.bzh)